

Brignou

Sant Vaze-Montroulez 1834 – Lanneured 1900)

Person e Lanneured

Istor ar Mab prodig, e tri arvest.

Bet embannet e 1883

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Iskiz a-walh eo doare-skriva Brignou. Anad eo levezon ar galleg (c e-leh, k, ss evel e galleg).

Ouspenn e vez brezonekaet gerioù galleg.

Sellit ouz “Google“ hag e kavot eur bern traou diwar-benn “Le fils prodigue“

Istor ar Mab prodig a ro da weled sklêr

Pegen mad eo Doue en andred ar peher.

Kinniget d’an Aotrou V.R.

Person P...

Evel merk a respet hag anaoudegez vad.

Taolenn

D'al lenner kristen
Istor ar Mab prodig

D'al lenner kristen

Or Zalver Jezuz-Krist e-unan en-deus teurvezet konta deom istor ar Mab prodig. Greet en-deus, koulz lavared, dre an istor-ze, poltred e Dad eternel, poltred an Aotrou Doue, on Tad 'zo en Neñv, hag a zo dreist-oll, ha dre natur, madelez a garantez : *Deus caritas est* ; an dra-ze, ivez, en-deus greet e boltred e-unan, pa'z eo ivez gwir Doue : *Deum da Deo* ; poltred beo e galon zakr, bepred digor-frank da reseo ar beherien pa zistroont outañ a galon vad. Nann, e neb leh, en Aviel, ne gavom displeget splannoh dirazom an teñzor iñfinit¹ a vadelez, a drugarez, a garantez a zo e kalon Jezuz en andred bugale Adam. O ! piou a hello kompren ledanded ha donder ar homzou kaer-mañ en Aviel : *Deus dilexit mundum* : Doue en-deus karet an dud ? Ya, Doue en-deus karet, ha karoud a ra c'hoaz an dud en eun doare dispar, evel dreist-moder, heb muzul, kant ha kant gwech muioh eged na gar he hrouadur ar vamm an denerra. Siwaz ! ar garantez-se da Zoue a zo dianvezet ha disprizet, zoken, gand eun darn vraz a gristenien digalon. A-giz ma lavare ar zantez vraz : An hini a zo karantez toud, **AR GARANTEZ N'EO KET KARET !**

Kalon zakr Jezuz karantezuz meurbed,
Ho-pet truzz ouzom !
Kalon dousa Mari bepred a gren dibeh,
Pedit evidom !

¹ iñfinit : galleg : didermen.

Istor ar Mab prodig

Lakaet e tri arvest

Da lakaad difazi ar seurt arveziou-ze, a anver e galleg *tragédie*, pa roont tro d'an dud da leñva, ha *comédie*, pa reont tro dezo da hoarzin, e vez desket er skolachou, da baotred ar retorik, ar reolennou-mañ :

Da genta, ne dle beza meneg enno, euz an eil penn d'egile, nemed euz a eun dra hepken : da laavred eo e tleont oll biza da lakad seder dirag an daoulagd eun dra hepken, eun taol kaer bennag, eun darvoud bennag, evuruz pe malevuruz, trist pe laouen, gwir pe gwir-heñvel.

D'an eil, e tle an dra, an darvoud-se, beza bet c'hoarvezet 'hed ar memez devez, pe da vihanna, war eun dro, d'ar memez mare.

D'an trede, beza bet c'hoarvezet er memez leh-douar, ha n'eo ket lod eul leh, lod en eul leh all.

Al lenner gouizieg a hello gweled ez eus bet dalhet mad, amañ, d'ar reolennou-ze.

Perzonachou

An tad

Ar mab hena

Ar mab prodig

Pharez, amezeg ha mignon d'an tad.

Elias, den a fiziañs an tad.

Manasez, mignon d'ar mab hena.

Azarias : mignon d'ar mab hena

Eur mesaer.

Diverradenn

Ar mab prodig a oa eet kuit pellig a oa euz ti e dad. E dad ne baoueze da leñva, pa deuas, a-greiz-toud, beteg ennañ ar brud euz ar pezh a oa degouezet gand e vab, er vro m'oa tehet evid beva en e roll. Mantret gand ar hlahar, an tad a gasas neuze unan euz e vevelien, Elias, e zen a fiziañs, d'ar vro-ze, da glask gouzoud petra 'oa deut e vab da veza, ha da ober e halloud evid lakaad anezañ da zistrei d'ar gêr. Nehet, o weled ne deue ket Elias en-dro, gand ar mall en-devoa da gaoud eur helou bennag euz e vab ker, an tad a fell dezañ, heb gedal mui, en em lakaad e-unan en hent da vond d'e glask. Eun amezeg dezañ, anvet Pharez, deuet n'oa ket pell da chom en e gichenn, hag e vab hena, distro diouz gweled eur verouri dezañ, a ra o-daou o galloud evid klask en diarbenn, e goñsoli, hag ober dezañ deport ma vezo distro Elias. Hemañ a zegouez erfin, mez n'en-deus ket gallet kaoud ar mab prodig. Setu, d'an eur-ze, krak, ar reuzeudig o tegouezoud dirag ti e dad, hag o kaozeal gand eun diwaller deñved anvet, er vro-ze, eur pastor, eur berje pe eur mesaer. Prestig goude, ez a d'en em deuler e-harz treid e dad, o houlenn e bardon. E dad a reseo anezañ gand eur joa dispar, hag e vreur, d'e dro, a bardon ivez dezañ, hag a ro dezañ ar pok a beoh.

An dra-mañ a dremen en eur hoad e-kichenn ti an tad.

Arvest kenta

Kenta diviz

An tad

Elias ne deu ket ! petra 'dlean soñjal ?
Konta an euriou², mez kaer em-eus gedal,
Ne welan netra toud. Peseurt darvoud, eta,
Deut siwaz ! en eun taol da zegouezoud ganta',
A venn moug a 'n elfenn a esperañs chomet,
E-kreiz va oll glahar, en va halon rannet ?
Mez, petra 'lavaran ? pep tra a ra din spont :
Mall em-eus e teufe, aon d'her gweled o tond.
Perag buannoh din ne zegas ket kelou ?...
Marteze n'eo nemed 'vid espern din daelou !...
Marteze, da lakaad ar barr d'am oll enkreiz,
En-deveus da gonta din maleuriou nevez,
Lavared a ray din n'en-deus va hrouadur
Mui Doue ebed ken nemed e blijadur ;
Ez eo en em roet da bep seurt pehejou,
Ha kouezet war e benn ar brasa dizurziou ;
En-deus teuzet beteg an diner diweza
Euz an aour, an arhant em-oa roet deza'.
Petra 'ra ze din-me ? O ! plijet gand Doue
N'em-befe da leñva nemed war ar holl-ze !
Goude toud, peseurt kelou bennag a zegaso,
O ! ra zeuy Elias dizale ha dillo,
Da zegas din eur ger, eur gerig, netra ken,
Diwar-benn stad va mab a ra va oll anken !
Pegen izel bennag e hell beza kouezet
Euz an islonk, 'michañs, e hell beza tennet ;
N'ez eus tra evid se na ven prest da ober.
O ! e pe stuz bennag e ve, ra zeuy d'ar gêr,
Hag en-defe kollet ha madou hag enor,
Va divreh, va halon a zo dezañ digor.
Petra 'lavaran-me, me 'fell din va-unan,
Pa ve da benn ar bed, mond da glask anezañ.

² euriou : eurvezioù.

Eilved diviz

An tad. Pharez

Pharez

Aretit, petra 'zo ? ne hellan mui pelloh
Gouzañv ar stad iskiz ma welan ahanoh ?
Deut, eun nebeudig 'zo, da jom en ho kichenn
A-veh ma houzon hoh anaoud, mez ho penn
Atao du ha teñval, a ra din gweled sklêr,
Ez eus, war ho kalon, eun boan bennag ponner,
Hag e kredan ez eo eun dever evidon
Klask rei deoh pe zoulaj, pe gonsolasion.
Va list eta da gomz... lavarit din, añfin,
Petra 'ro deoh kement a anken, a jagrin ?
O ! ya, livirit din... na guzit din netra,
Petra war ho kalon, petra 'zo o poueza ?
Evidon-me, seul-vui en-dro deoh e sellan,
Seul nebeutoh aze e komprenan ho poan.
Ne vank, evid eur gwel, deoh nemed paourentez.
C'hoaz eur wech, petra 'ro deoh ken braz kalonad,
Ha peseurt preñv a zo, noz-deiz, ouz ho krignad ?

An Tad

Pharez, me a zo tad, hag ouz an ano-ze
Mil ha mil boan guzet a zo stag noz ha de'.

Pharez

Tad oh, a livirit, me 'gred war gement-se,
N'hoh-eus nemed grasou da renta da Zoue,
Hag an ano a dad, ken dous ha ken tener,
A dlefe ho lakaad ha laouen ha seder.
Goud a ran e weler, re aliez, siwaz !
Bugale dinatur, savet fall ha dihras,
Hag a vez lavaret n'int deut war an douar,
Nemed evid laza o zud gand ar hlahar,
Bugale hag a ra d'o zud diskenn er bez,
Pell a-raog o amzer, a ruzied gand ar vez.
Mez c'hwi, war gement-se, n'hoh-eus ket, a dra zur,
D'en em glemm, rag ho mab 'zo eun den yaouank fur
Hag eñ 'zo bet biskoaz bugel gwelloh ganet,
Na, karakter êsoh, spered gwelloh troet ?
Atao en ho kichenn, n'ho kuita noz na deiz,
Ha war hoh aliou e vuhez oll e reiz.
Ober a ra pep tra en ho plas, en ho leh,
Pront eo d'ho tizamma ha da gemer ar beh.
Ha mar deo gwir, zoken, ar pez am-eus klevet,
Diwar ze, aliez, ganeoh e vez meulet.
Gouzoud a ran ohpenn, ez eo ganeoh karet,
Ha ne guzit outañ morse netra ebed.
Hag eñ, diouz e gostez, m'her goar ervad ivez,

En-deus en hoh andred doujañs ha karantez,
Hag e laka e boan da blijoud deoh bepred.
An traou-ze toud, hirio, a zo rouez meurbed
E-touez an dud yaouank : rag se, hiviziken,
Na dit mui d'en em glemm, pe n'ho komprenin ken.

An Tad

Gwir eo, o ! va mignon, iñjust e ven ha foll
Mond da glemm euz eur mab 'zo meulet gand an oll,
Ha penaoz e hellfe chom dizeblant eun tad
A wel oh e vugel ober kement a stad ?
Eñ 'zo baz va hoant, hag enor va bleo gwenn,
Ha mar kar ahanon, m'her har kant gwech ohpenn.
Nann, n'eo ket eñ a ra koueza puill va daelou,
Eun all eo a zo kaoz euz va oll ankeniou :
Eur mab all eo, em-eus, a ro din kalonad !
E diou feunteun en-deus cheñchet va daoulagad.
Mez petra 'lavarant, marteze n'em-eus ken...

Pharez

Eur mab all ?

An tad

Hag a zo penn-kaoz d'am oll anken !

Pharez

N'her gouien ket ; deuet nebeud 'zo er vro-mañ,
N'em-oa klevet morse den o komz anezañ.
Atao em-oa kredet n'ho-poa nemed eur mab,
Euz an oll dud yaouank ar fleurenn, an dibab.
Mez petra 'livirit ? D'ar zur ne ouzoh ket
Hag ar mab all-ze deoh 'zo beo pe desedet ?
Ekskuzit mar fell din anaoud sekred eun tad,
Ne glaskan, bezit sur, nemed ho prasa mad.

An tad

Ha perag e fell deoh divuni va glahar
O konta deoh va foan ha va maleur dispar ?

Pharez

Amenit eun nebeud eur zoursi ken direiz.

An tad

Ha penaoz ? va spered a zo ennañ noz-deiz :
Netar n'hell habaskaad ar jagrin diremed
A ro din va mab paour, pell diouzin tehet,
En despét din, zoken, e goueled va halon,
E klevan an natur o houlen e bardon.
Pegen dihras bennag eo bet, pegén ingrad,
Santoud a ran n'on ket 'vid e ankounac'haad.

O ! poan en-deus greet din ! anaoud a rit e vreur :
Outañ a garakter en oa disheñvel-meur,
Her lavared a ran, siwaz en eur leñva,
A spered, a imor, n'oa tamm heñvel outa' .
Otuz ha koleruz, endro 'vel an avel,
Pennog ha froudennuz, diêz-braz da zerhel
Lezireg, dieguz ; d'ar blijadur, avad,
A-benn herr her gweled oh en em rei dalhmad.
Ez-vihanig e welis an techou-ze enna' :
Diwar neuze e klaskis an tu d'o divenna.
Evid se petra 'ris ?, ha petra ne ris ket ?
Va daoulagad warnañ a oa digor bepred.
Pedennou, komzou flour, aliou, rebechou,
Skweriou a rezoniou, proimesaou, gourdrouzou,
Douster, pasianted, ne espernis netra,
Evid gounid e galon evid her sujea.
Siwaz din ! koll a ris va foan ha va amzer,
Ha kement am-eus greet a zo bet en aner.
Dizale e kavas va zi re enk, re striz ;
N'en-doa ket, a grede, a-walh a frankiz.
Va gweled o vervel a oa e vrasa mall,
Evid heuill digabestr e youl, e dechou fall.
Hage hunuaden, va halon vantret oll,
O weled, evel-se, va mab o vond da gaoll !

Pharez

Beteg pegeid, añfin, en hent-se ez eas ?

An tad

E-pad m'edon gantañ ankeniet gwasoh-gwaz
Hag e-pad ma poanien ha ma taolen evez
Da espern e galon hag e zempladurez,
Setu-eñ, eun devez, war-zu ennon o tond,
Gand eun êr avelet, otuz ha divergont,
Ha war eun ton dicheg : « Va zad, emezañ din,
Poent eo, diwar eun dro, d'an traou-mañ lakaad fin ;
Gweled a ran emañ a re 'barz en ti-mañ,
Ha me, diouz va hostez, a zo diêz ennañ.
Gweled a ran, pell zo ; na deoh-hu na d'am breur,
Va imor, va doare ne blijont ket nemeur,
Ya, poent eo krenna bett d'eun heveleb buhez,
Gwelit petra 'deu din d'am lod euz ho tanvez :
Distaolit din va lod ma'z in da vale bro,
Ha goude birviken ne deuin war ho tro. »,

Pharez

Petra ? komz evel-se ouz eun tad ken mad all !
Ha posub eo gweled eur hrouadur ken fall !
Ha ne oa ket eno 'lavared deoh, heb mar
E kave e chomeh re hir war an douar ?

Mez c'hoaz, livirit din dre be seurt degemer
E reselfot eun taol ken mantruz, ken pounner ?

An tad

Spontet oll, o krena dre va oll izili,
E rin va oll galloud ebid e ameni.

Pharez

Ha penaoz, mar plij ?

An tad

E-leh rebech dezañ,
E hrvoude, neuze, o tiroll da leñva.
Diskouez a ris dezañ va bleo gwenn ha va oad ;~
Hag e poken dezañ gand karantez eun tad.
Mez siwaz ! ze galon a jomas kaledet
Hag ar bugel iñgrad³ ne reas van abed ?

Pharez

Tra spontuz !

An tad

Nann, 'varna n' homzou netr :
Ha setu-me, neuze, o rei e lod deza' ;
Etre e vreur hag e rannis va danvez,
Kalz a rois dez' .

Pharez

Ha c'hwi 'oa sod ivez !
Mond d'ober an dra-ze ; evidon, a-dra-zur,
Me 'gav ned oh ket bet, na pell ahano, fur,
Ha penaoz ! ha penaoz ! mond d'ober traou kemend-all !
Dibrenna dirazañ dor an oll dechou fall !
O rei skoazell dezañ d'ober droug, evel-se,
Hoh-eus en e galon plantet eun taol kleze.
Evidon, me a oar petra em-bije greet,
En eun toull bennag don em-bije hen taolet :
Gand bara-zeh ha dour e vijen deut, moarvad,
A-benn da zistana eun nebeudig e wad.

An tad

Allaz ! petra 'fell deoh ? n'eo ket va harakter,
Atao d'am bugale ez on eet dre zouster ;
Morse gand eun êr droug, atao laouen ha mad :
Evel-se 'tle ober, a gredan, peb gwir dad.

Pharez

Follentez ha fazi ! her gweled mad a rit.

³ iñgrad; galleg. Digalon.

An tad

Va dilezel a ra... setu-eñ o vond kuit.
O ! disparti skrijuz ! pebez taol evidon !
Eur hleze a hlahar a dreuzas va halon,
War ar bugel kriz-se e skuillis daelou puill,
Hag abaoe neuze ne baouezont da ruill,
Pa deuan er hoad-mañ da bourmen va anken,
Ha beteg ar maro n'o-devo mui termen.
Mez n'oa ket a-walh din kaoud kemend a boan :
A-greiz-toud eur helou leun a dristidigez
A zo deut d'am zeuler en eur jagrin⁴ nevez.
Dre al libertinaj⁵, ar jeu, a leverer,
E berr amzer va mab 'zo kouezet er vizer.
An danvez a jalme gwechall e zaoulagad
En-deus o dispignet ha foranet timad.
Dizenoret bremañ, gand an oll dilezet,
Dibourvez a bep tra, disprizet ha goapaet,
En-deus ranket kuitaad, paour-job ha reuzeudig,
Ar vro m'eo bet enni ha braz ha pinvidig.
Da beleh, va Doue ! e hell eñ bremañ mond,
O vale dre an hentchou en tu-mañ, en tu-hont ?

Phalez

Marteze n'eo ket gwir....

An tad

Ar paour-kêz ! re a leh
Eo em-eus d'her hredi, siwaz ! ha da gaoud neh !
Kaset em-eus unan euz va zud, eur mevel,
Ar gwella 'oufen kaoud, eun den sur ha fidel
D'he hlask, e peseurt bro e hell bremañ beza,
Gand urz da lavared, ha da ober deza'
Dond dineh, hag heb aon, d'ar gêr da gaoud e dad,
Pegen trist ha mezuz e hell beza e stad.
Prometet en-doa din ober buan ha pront,
Mez kaer em-eus gedal, n'her gwelan ket o tond.
Perag ivez d'eun all rei ar gevridi-ze !
Fizioud en eun estren... ! ha ne oa ket din-me ?...
Mond a rin, mond a rin !

Pharez

Gedit, da vihanna,
C'hoaz eun tamm : marteze ema tostig brema'.

An tad

Mignon, list ahanon, er hoad-mañ e karan
Dond da skuilla daelou, o pourmen va-unan,
Amañ pell euz an trouz hag oll savar ar bed,

⁴ jagrin : galleg. "glahar".

⁵ libertinaj : galleg : galladiez.

E hellan soulaji va foaniou diremed.

Pharez

Diêz-braz e kavan ho lezel er stad-se,
Koulskoude re vezo greet ho polonte' !
Mar plij deoh e teuin, a-wechou, d'ho kweled,
Da glask euz e anken distrei ho spered.
Doue ho sikouro : leun eo a garantez ;
Bezit ennañ fiziañs en ho tristidigez.
Hag e ve droug ennañ, nann, ne refuzo ket
Da eun tad eveldoh eur mab kement karet.

An tad

O ! ya, anaoud a ra va anken, va jagrin,
Ra zeuio, dizale ; da lakaad dezo fin !

Trede diviz

An tad ar mab hena

An tad

Sell, te 'zo deut, va mab.

Ar mab

Ya, deut on sur, va zad,
Hoh urzou 'zo roet, ha greet e vezint mad,
Rag me 'daolo evez, a bep tra 'm-eus kavet
En eur stad deread... mez perag oh troublet ?
Ho taoulagad 'zo ruz, ho penn a zo teñval,
Evel eur goabrenn zu eo trist meurbed ho tal ?

An tad

Joa 'ra ganen klevet ar pezh a levez,
Oh pep tra eh ouzout teuler pled hag evez

Ar mab

Mez livrit din 'ta, ar pezh a ra deoh poan !

An tad

N'eo netra.

Ar mab

N'eo netra ?

An tad

Nann, kred ahanon, nann.

Ar mab

Klask a rit va zrompla, mez ho huanadou
A verk eur boan bennag, hag ivez an daelou
A skuillit, kaer hoh-eus : livirit din perag
E leñvit evel-se ? Sur, eur boan vraz bennag
A zo war ho spered : va zad, livirit din ;
Livirit din perag en em guzit ouzin ?

An tad

Me, ouzit, o ! va mab, en em guzad, penaoz ?
Ha perag ?

Ar mab

N'on dare ; añfin, petra 'zo kaoz,
E-leh respont leal ha didro d'am goulenn,
E kuzit ho taelou hag e tavit a-grenn ?

An tad

En taoliou pounnerra war va halon kouezet

N'em-eus bet evidout morse netra kuzet.

Ar mab

Mar dalhit, alato, da devel krenn, en oll,
Ha n'am lakefot da gredi ar hontrol ?

An tad

Va lez, da vihanna, da guzad, en dro-ma',
Ouzit eun dra a hell da-unan da boania.
Furnez eo din hirio tevel, rag, sur, da boan,
O ! va mab, a greskfe va galhar va-unan.

Ar mab

Ha petra ! n'hellin ket, n'eus forz din pe ober,
Tenna euz ho kenou eun heveleb mister ?
A ! ho kalon, va zad, siwaz ! euz va hini,
Her gweled a ran sklêr, a gomañs diskredi.
Ha va gweled hoh-eus morse o traisa
Ar fiziañs hoh-eus bet ennon bete vrema' ?

An tad

Rag se 'ta eo din a-grenn disklêria dit
Eun dra hag a zlejen atao kuzad ouzit.
Med selaou, pa fell dit, ez an da lavared
Gand petra eo noz-deiz va halon merzeriet.
Da vreur, ar bugel-ze penn-kaoz d'am oll glahar,
En-deus d'am enkreziou bremañ lakaet ar barr.
Eur helou a gredan beza re wir, siwaz !
A zo deut a-greiz-toud d'am foania gwasoh-gwaz ;
Ne deo c'hoaz, mar kerez, nemed eur brud hepken,
Mez ar brud-se a red hag am harg a anken,
Ar brud-se a lavar eo da vreur rivinet,
Kollet e oll zanvez hag er vizer kouezet.
Euz al leh m'oa kuzet eet kuit, kazi en noaz,
Da beleh ez eo eet ? den ne oar, evid c'hoaz.
Setu ar helou trist a zalhen evidon ;
Hen diframmet eh eus euz goueled va halon.

Ar mab

Petra, va zad ? Eno ema toud ho chagrin ?
Setu an taol pounner a guzeh mad ouzin
An hini 'z om kollet, dizenoret gantañ !
Hag oh sod a-walh da ouela c'hoaz dezañ ?
Eun iñgrad, eun trubard, eur bugel dinatur,
En-deus touet ne vije ken mui ho krouadur !
Ha dre beseurt ijin, pe dre beseurt chalmou,
E hell ho lakaad c'hoaz da skuill warnañ daelou ?
Daoust hag e dorfet eo, daoust hag e vuhez fall
Eo a ra deoh leñva, e gared kemend-all ?
Pa ziskouezit dezañ kemend a vadelez

Goude eur faot ken braz, en despet d'e oll vez,
Em-eus avi outañ. Ar garantez tener
Em-eus diskouezet deoh, va zad, e peb amzer,
Dirag ho taoulagad a zo nebeud a dra
Evid ho konsoli euz ar holl aneza'.
Iñgrad eo ar fallaer ; mez gweled a ran se,
Her hared a rit, sklêr eo, muioh egedon-me.
Evitañ ho kalon a zo leun a enkrez,
Ennañ 'ma hoh oll soñj, ho teneridigez.

An tad

O ! va mab ker, penaoz e hellez-te,
Oh anaoud va halon, komz ouzin evel-se ?
Paouez, paouez d'ober din eur seurt rebechou,
Hag euz va daoulagad lez da ruill an daelou.
Mar kemeran enkrez gand da vreur, o ! soñj mad,
Soñj, en despet da dout, soñj ez on diou wech tad.
Dit-te 'z on tad bepred, o ! hirio, da vihanna,
Va lez da veza c'hoaz eun nebeud tad deza'.

Ar mab

Meur a wech koulskoude ho-poa din lavaret
Edo da virviken ganeoh ankounac'haet ;
Ho-poa euz e behed ar valis hag ar vez
A-grenn euz ho kalon hen taolet da jamez ;
Ne zanteh mui ennoh evitañ nep truez,
Hag ho-pije laosket ho taelou a-gostez ;
Va zrompla 'reeh, va zad.

An tad

A va-unan, zoken,
Va-unan, o ! va mab, war-ze en em dromplen.
Nann ; karantez eun tad 'keñver e grouadur
A zo plantet re zon dre zaouarn an natur,
Evid m'hellfe netra hen distruja morse :
Esper em-eus, eun deiz, e weli kement-se.
Anaoud a ri kalon ha karantez eun tad :
Gwech, ar garantez-se, gwir eo, a huanad,
A hirvoud, a hourdrouz, a fach, ha dre goler,
Oh en em drañsporti, gwech zoken, her gweler.
Mez e-leh disterraad, pa deu da gounnari,
Ne ra nemed brasaad, o kreski muioh-mui.

Ar mab

Espernit, da vihanna, eun nebeud ho kozni,
Ha n'en em daolit ket e ken braz melkoni.
Ho klahar a ray deoh koueza dindan ar beh :
Ar stad trist m'ho kwelan a ro din kalz a neh.

An tad

N'on ket evid mired : va halon a vank din,
Gand an amzer, eun deiz, marteze e savin,
Ha ma ne ra ket din an amzer vad ebed,
Da garantez, va mab, am zoulajo bepred.

Ar mab

Petar, tehed a rit ?

An tad

Al leh-mañ a garan ;
Va lez bremañ.

Ar mab

Penaoz, er stad ma ho kwelan ?...

An tad

Ya, amañ va-unan, lez ahanon pelloh.

Ar mab

Mad ! pa fell deoh, va zad, senti a ran ouzoh.

Pevare diviz

Ar mab hena

O ! bugel dinatur, breur fall ha kriz ma'z out,
Nag a huanadou, a zaelou evidout !
Dre da oll dorfejou n'az-peus ket c'hoaz mouget
Oll garantez an tad, eh-eus abandonet.
En despet d'az krizder ha d'az fallagriez,
E kar c'hoaz ahanout, ouzit en-deus truez.
Pegen evruz, eta, ne vijes ket bremañ,
Ma n'az-pije ket greet kemend a boan dezañ !
Mez an dra-mañ 'zo re : e deneridigez
Goude kement-se toud, a zo sempladurez ;
E-unan, er maleur, en-deus en em daolet,
Ar poaniou a houzañv en-deveus meritet.

Pemped diviz

Ar mab hena – Azarias – Manasez

Azarias

Edom o vond d'ho klask, hag heb mister ebed,
E tivinit, moarvad, da betra om deuet.
D'ar chase ez eom on-daou : pep tra ganeom 'zo par ;
Sur e teuio ganeom, emberr, meur a glujar.
An amzer a zo fresk, dizolo, en eur ger,
Eun amzer ar gwella da ober ar vicher.
Ahanta ! dond a reom ? n'ez eus netra, moarvad,
Hag a virfe ouzoh da gemer hoh ebat ?
Alo ! buan ! dillo ! ha dao d'ar hlujiri !
Rag 'michañs eo ganeoh debret ho tijuni ?

Ar mab

Allaz ! gand plijadur ganeoh e vijen eet ;
N'eo ket c'hoant a vank din, mez siwaz ! n'hellan ket.

Manasez

N'hellan ket a zo brao ! o ! na koanta respont !
Ha petra 'ta ! mar plij, a vir ouzit da zond ?

Ar mab

Deoh hen livirin, eeun, heb klask nep troidell,
Va zad a zo kouezet en eur jagrin marvel.
Hen lezel e-unan 'vid mond d'am plijadur,
A ve eun dra iskiz ha na rin ket, asur.

Azarias

Setu eno, avad, eur rezon a-zoare !
Gand ken nebeud a dra daoust piou 'n em ziêzfe ?
Setu c'hwi kondaonet, eta, da chom, dalhmad,
Hag evel eur babig, e-kichenn e dad ?

Manasez

Da dad, te 'wel, a zo e-giz an oll re goz :
N'eus peoh ebed ganto, nag en deiz, nag en noz.
Ar gozni 'zo atao ha tagnouz ha diêz ;
Evi gwir, kement-se ne deo ket eur souez,
Ha penaoz e fell dit, evid gwir, na ve ket ?
Atao gand remm, goutou pe gatar pistiget,
Gweled a ra, bepred, o tond war e zeuliou,
Ha kammed ha kammed, karrigell an ankou.

Ar mab

N'eo seurt euz an traou-ze.

Manasez

Ha petra 'n-deus, eta ?

Ar mab

Brud maleur va breur eo 'zo deut beteg enna'.

Azarias

Petra, ar penn skañv-ze a weljom, eun devez,
O vond kuit diganeoh, a-greiz-toud ?

Ar mab

Krak ! hennez.

Manasez

Petra, fidazomen⁶ ! da zebri e spered !
Ha mar chom ar paotr koz e-giz-se chagrinet,
Bep tro ma tibuno litanioù an anken,
Ha red e vo dit-te respont atao Amen ?

Ar mab

Me ? o tra ! n'en-deus ket leh d'en em jagrina,
Mez en-dra 'vo e poan, eo da din chom ganta'.
Dilezel anezañ e-kreiz e zizesper,
A ve, sur, a gav din, mond eneb va dever.
Va flas 'zo en e gichenn, hervez va houstaiñs,
Ha ganeoh e plijo va ekskuzi, 'michañs.

Azarias

Mad, kerz, kerz pa fell dit, kerz da leñva ganta' ;
Ganeom-ni n'ema ket ar mare da leñva.

⁶ fidazomen : estlamadenn : marteze : feiz din-me !

Eil arvest

Kenta diviz

Ar mab prodig, (*e-unan*)

Abaoe ma'z on eet er-mêz euz ti va zad,
Va buhez, a boaniou, a zo eur chadennad.
Mez setu-me, añfin, a-zirag an ti-ze :
Netra ennañ, abaoe, n'en-deus cheñchet doare.
Hoh anaoud a ran c'hoaz, o ! lehiou dudiuz !
Em-eus bevet enno kontant hag evuruz !
O ! meneziou, koajou, a garen kemend-all !
O ! nag a blijadur 'm-eus bet ennoh gwechall,
O haloupad ennoh, em bloaveziou kenta !
O ! ar gwel ahanoh a ra poan din brema' !
Rebech a ra pep tra din, amañ, va zorfet.
A ! siwaz ! pegement ez eo bet din koustet !
O ! ha me 'oa ivez ha diskiant ha foll,
O veza ken evruz, mond war va fenn da goll !
Karget a zismegañs, kaset kuit euz peb leh,
Lavared a hellan, a boaniou 'm-eus va beh !
P'edon evruz, gwechall, em-boa kalz mignonned,
Mez bremañ ez int oll pell diouzin tehet.
Ankounac'haet o-deus ar vad 'm-oa greet dezo,
Pa 'm gwelont, e c'hoarzont, en eur zelled en-dro.
Trubarded ! tud fallagr ! goude va rivina,
Dond c'hoaz d'am iñsulti !... Eur gernez ar grisa,
Eun naonegez spontuz 'zo degouezet er vro,
Ha setu 'vid galloud bepred ouz ar maro,
Ankounac'haet ganen va enor, va lignez,
Ez on en em lakaet... ruzia 'ran gand ar vez,
Pa zoñjan, da ziwall ar moh... ! mez ne oa ket
A-walh kement-se : izelloh on kouezet :
Dond a ris, dond a ris beteg beza jalouz
Euz ar boued a roed d'an anevaled louz.
Dond a ris da veza e-giz eun aneval,
Ha da gemer va renk e-touez ar chatal.
Distruj, du gand an naon, kazi hanter-varo,
E houlennen ar méz a vez roet dezo,
Ha den ne roe din ! me, bet em yaouankiz,
Maget, ken dilikad, bevet hervez va giz !
Ar soñj-ze a skoas kement war va halon,
Ma her gwelan bepred, em spered, dirazon.
Ha me o lavared din va-unan, neuze :
Nag a zervijourien ha ne vank netra de⁷,
Du-hont, e ti va zad, ha me amañ, siwaz !
'Zo dare gand an naon, paour-job, ha kazi noaz !

⁷ de : dezo.

Ha me a gavfe gras beva en o zouez !
 Va gouzañv a ve c'hoaz ober din trugarez.
 Ne glaskom ket sevel uhelloh : mab,gwechal,
 Em-boa va oll gwiriou, evel ar vibien all ;
 Bremañ, renk a wiriou, kollet em-eus pep tra,
 Hag e izelloh stad ne hellan mui koueza !
 Her zantoud a rez 'ta, iñgrat ! mez pegen braz
 Eo an drouz em-eus greet, esperoud a ran c'hoaz
 E madelez eun tad : en despet d'am zorfet,
 Ma ne fell mui dezañ da vab va hemered,
 Evid mevel dezañ ez an d'en em ginnig :
 Truez a gemero ouz va stad reuzeudig.
 Va halon, evid gwir, a vrañsell, deom atao,
 Marteze, marteze va zad am fardono.
 Va zad, a livirin, mantret gand ar glahar,
 Hag oh en em strinka d'e dreid ouz an douar,
 Va zad, pehet em-eus, 'eneb deoh ha d'an neñv,
 Ne veritan, allaz ! ho koler nemed re.
 Goloet oll a vez hag a geuz d'am zorfet,
 Ne fell ket din goulenn beza degemeret
 Ganeoh evel ho mab ; nann, nann, da zervijer,
 O ! ya, plijet ganeoh, e gras, va degemer.
 Ha setu-me en hent gand ar soñj-ze : bremañ,
 War-bouez en em dreina on degouezet amañ.
 Mez n'on dare petra 'zo kaoz, ne gredan ken
 Mond larkoh : evid gwir penaoz, penaoz souten
 Ar gwel demeuz va zad : bremaig e kave din
 Her gweled o toned er hoad, dre ar jardin ;
 N'edo nemed a-bell : fazia 'reen, moarvad,
 Ha setu-me o trei war va hiz 'barz er hoad.
 Aon em-boa kemeret, aon em-eus rag pep tra,
 Ha penaoz, pa vin tost e sellin-me outa' ?
 Dindan an truillou-mañ, daoust hag e zaoulagad
 A ouezo piou ez on, hag ez eo eñ va zad ?
 N'e' ket, soñj mad em-eus, o ! brasa melkoni !
 En eur seurt ekipaj e kuitais e di.
 Nann, gwisket kaer e oan, ha pinvidig meurbed :
 O ! traou kaer ha danvez, da beleh ez oh eet ?
 O !... mez kleved a ran unan bennag o tond...
 Eur mesaer eo a deu gand e zeñved du-hont.
 Dond a ra en tu-mañ : hennez, heb mar ebed,
 'Zo karget gand va zad da vesa e zeñved ;
 Ouz her gweled, va foan a zantan o kreski,
 Er stuz m'en em gavan, e stad 'ro din avi,
 Tremen a ra dioh amzer gaer e vuhez,
 Amañ ne vank netra dezañ ; allaz ! ha me,
 Me 'vank din pep tra toud, a-zindan bolz an neñv !

Eilved diviz

Ar mab prodig – Eur mesaer

Ar mesaer

Dre beseurt avañtur pe zarvoud, kamarad,
Ez oh-hu degouezet amañ e-barz ar hoad ?
Ha dianket e veh ? doare 'h-eus da gaoud poan,
Gwech a-raog, gwech a-dreñv, o kerzed ho kwellañ.
Livirit din pe hent a fell deoh kemered,
Me 'oar an ardremez euz ar hoad-mañ, parfet.
M'ho hentcho, mar kirit ?

Ar mab prodig

Mignon, bennoz Doue !

Mez n'em-eus ket ezomm ahanoh evid-se.
Anaoud a ran va hent, n'em-eus ket pell da vond.
Mez da eur goulenn all ho pedin da respont,
Da vihanna ma ne gavit eun tamm re guriuz.
Eun dianav o tremen en eun heveleb stuz,
Piou eo, livirit din, perhenn, mestr hag Aotrou,
An oll douarou-mañ : traonienn, plênenn, koajou,
Hag ar maner a welom a-hont war lein ar menez ?

Ar mesaer

Respont d'ar goulenn-ze ne gavan ket diêz.
An hini 'zo dezañ kement 'welit aze,
Ar maner, ar hoajou, an deñved-mañ ive',
A dle kement-se toud d'e dud koz ha d'e dad ;
Eun den a ouenn uhel, intañv, deut war an oad :
Gallouduz eo meurbed dre vadou, dre zanvez,
Mez galloudusoh c'hoaz eo dre e vadelez.

Ar mab prodig

Ha c'hwi a zo evruz kaoud eur mestr evel-se !

Ar mesaer

Nann, gwelloh evitañ ne gredan ket e ve.

Ar mab prodig

Mez hag eñ 'zo disher ? n'en-deus bugel ebed ?

Ar mesaer

N'en-deus nemed unan, siwaz ! daou en-deus bet.

Ar mab prodig

Unan !

Ar mesaer

An dra-ze 'ra e boan hag on anken.

Ar mab prodig

Er bez ho-peus gwelet egile o tiskenn ?

Ar mesaer

Nann, n'e' ket ar maro en-deus on ankeniet,
Mez eun darvoud gwasoh, glaharusoh meurbed.
Ar bugel fallagr-se, hag eet bremañ da goll,
En-deus kuitaet e dad 'vid beva en e roll ;
Kas a reas gantañ e lod euz e vadou ;
Abaoe, anezañ ne glevom seurt kelou.

Ar mab prodig

A ! petra 'livirit ? tro euzuz ! tra iskiz !
Kalon eur mab, hag hi a hell beza ken kriz ?
Piou, ouz ken braz torfet, n'en-defe kasoni ?
Peseurt poan a hellfe, morse, he repari ?
Mez tan ar yaouankiz, a-nerz e dechou fall,
O-devoa, marteze, rentet anezañ dall ;
Mez n'eo ket glaharet kement ha ma tlefe,
Ma n'eo ket braz e geuz, bez' e vo dizale.
Livirit din bremañ petra 'n-deus greet an tad ?

Ar mesaer

Gouelet en-deus c'hwero dezañ, va hredit mad.

Ar mab prodig

O ! teneridigez ! madelez braz meurbed !
Hga a rent kalz brasoh faot ar mab, e behed.
An tad en-deus gouelet ? pebez tad !

Ar mesaer

Ha bepred

E ouel ; hag e jagrin a zeblant diremed.
Hag e dristidigez, e-leh diminui,
Abaoe nebeud 'zo, ne ra nemed kreski.
N'ouzon dare ket petra a gresk a ankeniou,
Mez amañ her gwelan, bemdez, o skuill daelou.

Ar mab prodig

Ra zeuy Doue, dizale, da lakaad fin dezo !
Mil bennoz, va mignon, mond a ran, kenavo !

Trede diviz

Ar mesaer

Ar paour-kêz den yaouank ! e pe stad trist ema !
Meritoud 'ra, 'gav din, 've gwell an traou ganta'.
E galon, dre ar pezh em-eus dezañ kontet,
Ha se n'eo ket souez, a zo bet oll boukaet.
Mez setu e klevan mouez klemmuz va Aotrou ;
N'am gwel ket : e hlahar a vir hag e zaelou.
Ma ouezfe m'on amañ, marteze e ve jeinet,
Ha neuze, red eo din mond da gaoud va deñved.

Pevare diviz

An tad

Pront eo da fazia an neb 'zo er glahar,
D'en em jala ivez eo ijinuz dispar.
Eun den yaouank, aze, 'gav din beza gwelet.
Ha va halon, em hreiz, a zanten o lammed.
Kredi 'reen 'oa va mab : evid gwir, pa zoñjan,
E seblante din, sur, beza evel outañ,
Ar memez gobari : buan on deut, eta,
Mez kaer em-eus bet klask, dispariset e oa.
Furchet em-eus er hoad : netra n'em-eus kavet,
Goude toud, marteze ez on bet faziet ;
Mez eus va mab paour, peur em-bezo kelou ?
Elias ne deu ket !...

Pemped diviz

An tad – Elias

Elias

Setu-me deut, Aotrou.

An tad

Te eo, mignon Elias ; A ! deut out ‘ta, añfin !
Ahanta ! A ! va mab ? O ! lavar, lavar din,
Ha n’eo ket deut ganet ? n’eh-eus ket her havet ?
Ha n’eh-esu ket te din amañ hen degaset ?
O ! ne levez ger : petra eo dit tevel ?
Petar ‘m-eus da hedal ? komz, o ! mignon fidel.

Elias

N’em-eus nemed traou trist da zeski deoh, Aotrou.

An tad

Petra glevan ? n’eh-eus nemed traou trist.... ayou !
N’eh-eus nemed traou trist da zeski din, bourreo ?
A-walh ! echu toud, a-walh , o ! me ‘gleo
Va mab a zo maro, na lavar mui ken din,
Ha me a zo c’hoaz beo ? o ! tad ! o ! tad indin⁸ !
Te eo ah-eus roet dezañ eun taol kleze.
A-red ‘oa dit selaou ar yaouankiz dall-zse !
Me eo ‘m-eus her hollet, dre va zempladurez.
Euz a-berz e-unan n’oa nemed dallentez,
Fazi, a-nerz ar gwad ; euz va ferz, eun torfet.
O ! va mab ! o ! va mab ! me em-beus da lazet.
Ha penaoz n’hellan ket, hirio, o ! va mab kêz !
Da brena da hini, rei amañ va buhez ?

Elias

N’em-eus ket lavaret, Aotrou, p’oa da ouela
War eur maleur ken braz...

An tad

Va mab ‘zo beo, eta ?

Elias

N’em-eus, war gement-se netra d’asuri deoh.
Mez leh ‘m-eus d’her hredi ha d’esperoud kentoh.

An tad

Esperoud ! na petra ! ‘vid remed d’am anken,
Eun dro hir ah-eus greet, ha n’e-teus kavet ken ?
A ! perag, Elias, va derhel evel-se ?

⁸ indin : galleg “dizellezeg”

Petra 'ouzout ? lavar sklêr, ha n'eus forz petra e ve.
Aon e-teus bet, moarvad, allaz ! da beurziskar⁹
Eun tad ken malevruz, ha beuzet er glahar ?
Nann, nann, o ! lavar din, lavar din, peleh 'mañ ?
Mond a rin, mond a rain, me 'gavo anezañ.

Elias

O ! m'am-bije, war ze, kavet tamm sklêrijenn,
Nann, bezit sur, amañ heptañ, deut na vijen

An tad

Hag e-teus kredet dond dirag va daoulagad ?

Elias

Ya, mez en despet din, evid espern eun tad.
Muioh 'vid se n'em-eus greet, petra 'hellen ober ?
Hag a-boan, a-dregas em-eus ranket kemer !
Dre garantez evidoh, peleh ne doan ket bet ?
A-veh kavet ganen ar gêr m'oa 'n em dennet,
O soñj beva enni, pa dehas euz ho ti,
Setu-me d'ar haloup o voned beteg di.
Ha kerkent e klevan eno e zizurziou,
E oll zispignou foll, e libertinajou.
Euz e istor, añfin, e klevis an diwez,
Penaos eh echuas eno e wall vuhez.
Muioh 'vid na greden war e gont 'm-eus klevet :
Mez ar pezh 'zo gwasoh, n'em-eus ket her havet.
Goude e wall-zarvaoud, d'eur vro bennag estren,
Ez eo eet da guzad e vez hag e anken.
Dre be hent ez eo eet ? kaer em-eus bet goulenn,
N'em-eus gallet, war ze, kaoud neb seurt sklêrijenn.
Evid dildezel eun tres bennag deza'
E redis adarre, endra 'hellis : netra !
Eun devez, koulskoude, en eul lochennig koad,
A-forz da isplika e êr, e vent, e oad,
E klevis e oa eet tost eno da ginnig
E zivreh, d'eun Aotrou uhel ha pinvidig.
Hag eno 'n-deus ranket koñsanti, respet deoh,
Rag du 'oa gand an naon, mond da ziwall ar moh.

An tad

Pegen izel, va mab, ez out eta kouezet !
'Vid eur vicher ken vil daoust ha te 'oa ganet ?

Elias

Mez, pe deut 'oa dezañ memor zau e lignez,
Euz an ano a zoug, ha savet gantañ mez,
Pe dre eun abeg all ha n'em-eus ket klevet,
Kuitaet en-doa ar garg en-devoa kemeret :

⁹ beurziskar : diskar penn-da-benn.

Hag, evel abaoe, kaer em-eus bet ober,
Ne gaven tres dezañ, ez on deuet d'ar gêr.

An tad

O ! petra 'deuin-me eta, hiviziken,
Da veza, pa gollan an esperañs, zoken ?
Peleh ez in d'az klask, bugel re vlevruz ?
Peseurt kogn euz ar bed d'am daoulagad az-peus¹⁰ ?
O ! euz kalon eun tad disfizioud evel-se !
Perag mond e leh all, e-leh dond d'am zi-me ?
Distro, distro, va mab, va zi 'zo da hini,
Da faot 'zo pardonet, ne zoñjan ennañ mui.
Nann, va halon, va mab, ne zoñj nemed eun dra :
Da garet en-deveus, ha da gared a ra.
Deus, pardonet eo toud : allaz ! ar yaouankiz
A dromplas ahanout, diouzin, pa dehi¹¹.
Me 'zo da dad atao, distrao, va mabig paour,
Hebdout, petra 'dalv din an arhant hag an aour ?

¹⁰ az-peus : ? "az-peus kuzet".

¹¹ dehi : "dehis" er skrid orin (Evid ar rim ?)

C'hwehved diviz

An tad. Ar mab hena. Elias

Ar mab hena

Petra ? er memez stad mañ c'hoaz ho kwelan ?
Netra n'hell ameni ho chagrin, ho kouelvan ?

An tad

An traou em-eus klevet bremañ-zouden, allaz !
Ne hellont, a-dra-zur, nemed o hreski c'hoaz.
Ma hellfen esperoud !...

Ar mab hena

Ha petra 'ta, va zad ?

An tad

Elias a lavaro bremañ deoh e pe stad
Ho preur....

Ar mab hena

da Elias

Lavar, eta, ha na guz netra din.

Elias

Ho preur a zo kouezet warnezañ ar rivin,
Goude beza kollet enor, danvez, pep tra.
Taolet er-mêz ar vro 'n-deus kollet anezañ¹²,
Evid lakaad ar barr d'e valeur, heskinet,
Duet oll gand an naon, er vro ma'z eo bet eet,
(Er vro-ze 'oa, neuze, eur gernez ar vrasa,
Ma weled a-strollou an dud o perisa),
Evid gelloud beva eo bet dezañ red-mad,
Mond da ziwall ar moh, mez gand ar vez, moarvad,
Ez eas ahano eun deiz, ha den ne oar
Dre be hent ez eo eet, e peseurt kogn douar
Ez eo en em dennet, ha setu aze toud
Ar pezh, diwar e benn, em-eus gallet da houd.
Añfin, n'ouzon dare pe 'z eo beo pe n'e' ket.

Ar mab hena

An digalon ! beza ken izel diskennet !

Elias

Ar vizer a ziskar ar gouraj ar hreñva :
Pe ober¹³ er stad-se, Aotrou, nemed plega ?

¹² anezañ : anezi (ar vro ?)

¹³ Pe ober : Petra ober

Ar mab hena

Mervel kant gwech kentoh eged koll an enor !

An tad

Fazia 'rez, va mab, o selaou da imor :
An taoliou-ze 'zleem da hedall sur, heb mar ;
Pa reer da vouez Doue, allaz ! skouarn vouzar,
Lezennou an enor ne dint netra d'an den.

Ar mab hena

Amenit 'ta, neuze, ho klahar, hoh anken.
C'hoant en-doa mond da goll, en islonk eo kouezet ;
Greet an taol, d'ar maleur n'ez eus ken remed.
Kollet eo : ha peseurt esperañs a zalhit ?
Ha da betra 'servij an daelou a skuillit ?

An tad

Gwir eo, d'am dizesper n'ez eus remed ebed,
Ma ne deu ket Doue d'ober din her gweled.
Mez kousto pe gousto, peleh bennag emañ,
Mond a rin, va glahar hepken a zelaouan.

Ar mab hena

Goude an torfejou 'heller dezañ tamall,
Penaos e komzit deom euz a enklaskou all ?
Eñ, va zad ? iskuzit, an dipit a zantan,
Eñ hag a veritfe e ve serret outañ
An nor, mar kredfe dond d'en em ziskouez el leh
M'en-deus gouezet brao-braz, gwechall, kemer an teh !
Petra, c'hwi a laoske eur mab fidel bepred,
Evid klask eun iñgrat en-deus ho tilezet ?
Petra 'lavarant-me ? mez nann, kerzit, va zad ;
C'hoant hoh-eus, neketa, mond d'e glask ? – A zo mad,
It, o selaou mouez ho karantez re vraz,
Da rei kouraj dezañ da ober gwasoh-gwaz ;
Mez e peleh ar bed her hlaskot, da vihanna ?
E peleh, a gav deoh, e kavfot anezañ ?

An tad

N'oun dare, va glahar am-bezo d'am hentcha :
Doue 'ray, goude-ze 'vel ma plijo ganta'.
Mez da gaoud va bugel ma n'hellan dond a-benn,
E varvin er glahar, hag e varvin laouen.

Ar mab hena

Ha petra 'h-eus fouret en ho penn, o ! va zad,
Da vro an huñvreou ez it da haloupad.
Ha posubl eo beza dalloh eged n'ez oh ?
Nann, nann, n'ho lezin ket : biken se ne refoh.
Nann, ha petra bennag e karan deoh plega,

Ho karantez ne vezo ket ar vestrez ama'.

An tad

Lez ahanon, Elias, te ivez en em denn,
Me 'fell din, er hoad-mañ, beza va-unan-penn.
Er stad m'en em gavan, e-kreiz va oll henerez¹⁴
Ne gavan a habaskter nemed dindan ar gwez.

¹⁴ henerez : ? "kozni", marteze.

Seizved diviz

An tad. Ar mab prodig

An tad

(e-unan)

Va-unan 'maon, añfin, o ! va halon, komzit,
Komzit, hag en ho kêz, c'hwi, va daelou, ruillit.
Kemerit interez evid eur bugel kêz
A zo amañ barnet gand an oll didruez.
O ! n'hen dilezit ket, n'en-deus, hirio, mui den
D'hen divenn, er maleur, nemedon ha c'hwi ken.
Ha n'eus mui esperañs evidout, va mab kêz ?
Doue hag-eñ n'hell mui ober deom trugarez ?
Daoust ha n'hellin, a-forz da bedi, da ouela,
Euz da stad reuzeudig dond añfin d'az tenna ?
Ne vezim-ni morse, te ha me, unanet ?
O ! va mab...
(ar mab prodig a weler o tond ha kerkent o vond kuit)

Mez unan bennag aze 'zo bet
A gav din ; da beleh eo eet ?... faziet on.
Va glahar eo, moarvad, a drompl c'hoaz ahanon...
Gwelet 'm-eus, koulskoude, va Doue ! petra 'rin ?
Ema deut adarre.... , dond a ra 'trezeg din...
Piou bennag out, tosta a-zineh, a-zispont.
Mez petra 'zantan-me, ennon, en eun taol-kont ?
Eun dra bennag em hreiz a lamm... o ! va halon !
Petra ? n'eo ket va mab eo a zo dirazon ?

Ar mab prodig

(e-harz treid e dad).

Koupabl 'eneb Doue hag eneb deoh, va zad,
D'ho treid 'h en em strinkan, dezo 'fell din pokad.

An tad

Penaoz ? te eo, va mab ?

Ar mab prodig

Me eo, sur, an iñgrat !
Mab fall, trubard, muntrer eun tad tener ha mad.
Eñ eo 'zo dirazoh, goloet oll a vez.

An tad

O ! petra 'levez ? va mab ! o ! va mab kêz !

Ar mab prodig

Hqa rei a rit-hu c'hoaz an ano tener-ze
Da eun den reuzeudig, ha ken fallagr ha me ?
Euz eun ano ken dous, o ! nann, hiviziken,
Nann, n'am enorit ket, rag n'her meritan ken !

An tad

Eo, va mab out, n' deus forz petra 'hellfes ober,
Sao, va mab, sao buan, pok din, o ! va mab ker.
N'hellan ket mui, pelloh, er stad-se da weled.

Ar mab prodig

Ankounac'haad a rit ken buan va zorfet ?
A ! pa'z on deut d'ho ti da goulenn degemer,
Godue bale kement, o vond euz kêr da gêr,
Va zoñj n'eo ket bet klask ar renk nag an ano
A vab ; dre va fehed 'm-eus kollet anezo.
N'em-eus ket gouezet beza eur mab, n'am anvit ken
Euz an ano-ze 'ta ; e renk ho mevelien
Va lakit, ha bezit va mestr ha va Aotrou.
Joa 'vezo ganen plega d'ho lezennou.

An tad

Nann, va mab e vezi, haq va oll garantez
A vezo dit bepred ; reseo evid herez
Eur walenn euz va dorn.
(Lakaad a ra dezañ eur walenn en e viz).

Ar mab prodig

O ! va zad ! koulskoude !

An tad

Nann, ne zervij ket dit, kemer ar walenn-ze.
N'eo ket toud, poan a ra d'am daoulagad gweled
Ar merkou a vizer ma'z out oll goloet.
Hop ! hop !... unan bennag ! Elias, aze 'maout ?
Amañ buan !... petra !... den ne deuio d'am haoud ?

Eizved diviz

An tad. Ar mab prodig. Elias

An tad

Elias ! va mab ker, sell, eo¹⁵ 'zo dit rentet :
N'em-boa mui ken fiziañs, kredi 'reen 'oa kollet.
Setu, dre hras Doue, eo din rentet salo.

Elias

O ! deiz, teir gwech evruz ! ra vo meulet ano
An Doue mad, en-deus, en eun doare dispar,
O renta deoh ho mab, lakaet fin d'or glahar !

An tad

N'eo ket se, Elias, distro, ha kerz d'ar red
D'ar gêr ; gra ma vezo, ha dillo, pourchaset
Dillad nevez d'am mab ; laka ober, ouspenn,
Eur banked ar haerra, gand dañs ha sonerien.
Rag c'hoant 'm-eus e teufe, hirio, va merourien
Da gemered oll perz em laouenedigez.
Kerkent ma errui, laka laza ivez
Al leue gwella maget e-touez va oll chatal.
Ke buan, war da lerh ni a yelo raktal.
Ha te, te hag am rent hirio ken evuruz,
Hag a ra din santoud eur joa ken dudiuz,
O ! va mab, bet kirieg da gement a zaelou,
Mez a laka bremañ fin d'am oll enereziou¹⁶,
Te a rent hirio din ar peoh, al levenez,
Deus da gemer em zi ar plas a veritez.
Kas kuit ha gand evez, diwar-dro da spered,
Ar soñj euz a boaniou da vuhez tremenet.
Deus, ha konsol da dad beteg fin e vuhez.
Va halon, evidout, a deneridigez
A zo leun : em hichenn, tañva, tañva bepred
Eun evrusted e-poa pell diouzin klasket.

¹⁵ eo : iskiz. Hennez 'zo dit rentet.

¹⁶ enereziou : ?

Trede arvest

Kenta diviz

Ar mab hena. Pharez

Ar mab hena

A ! pebez taol kaer 'ta, en-deus c'hoant da ober,
Hag a ray, a dra zur, ma 'n em diarbenner !
Reded war-lerh va breur, hennez en e froudenn,
Heb gouzoud peleh 'mañ, nag eñ 'zo beo zoken.

Pharez

Na da ket da gemer evid-se re a neh,
Din-me en-deus ravodet c'hoaz ar memez tra, deh.
E anken, a-wechou, 'zeu da veza ken braz,
Ma ne fell mui dezañ gedal ken Elias.
Evid kaoud ar mab-se, e talh dezañ kement,
E komze diwar-benn mond e-unan en hent :
Gallet em-eus, erfin, kompeza e spered,
Ha greet dezañ deport Elias da zoned,
Deut eo, a livirit, ahanta ? hag ho preur ?

Ar mab hena

Eun dra ken a zo sur, kouezet eo er maleur,
Mez gouzoud da beh e ez eo eet, den ne oar.

Pharez

Ar helou-ze a zle beza estreged glahar
Kalon dener ho tad....

Ar mab hena

Ema en he gwas, a
A livirit din c'hoaz, evid piou na petra ?

Pharez

Klemm a ran anezañ hag hen iskuz a ran.
Tad eo : ha da eun tad koll eur mab a ra poan.
Pep tra 'zo permetet en eun heveleb stad,
Beteg klask remedou pa vez re ziwezad.
Diwallom da vlesa muioh-mui e galon,
Mar fazi, e fazi a verit or padron.

Ar mab hena

Kee d'her gweled, neuze, fiziañs em-eus ennout.

Pharez

Fizioud 'hellit ennon, ober 'rin va galloud.
Mez c'hwi, euz ho kostez, a rafe ivez mad,

Hilligad eun nebeud, floura chagrin ho tad ;
Lavarit eveltañ, ha warnoh kemeret¹⁷,
Da zeblantoud beza koulz hag eñ aflijet.
Mar komz euz bale bro, da vond da glask ho preur,
Kinnigit mond gantañ, diouzin, ha war an hent,
Gwella louozu d'an traou-ze, me 'gred, eo an amzer ;
Evidon, da vihanna, me 'raio va dever.

¹⁷ kemeret : kemerit.

Eilved diviz

Ar mab hena. Azarias. Manasez

Manasez

Te c'hoaz amañ ?

Ar mab hena

Gweled a rit.

Manasez

Peseurt buhez !

Gw<lloh e-pije greet dond ganoem, va faotr kêz,
O ! nag a blijadur ! nann, morse, n'am-boa greet
Gwelloh parti chase ; nag a draou 'zo kouezet !
Pas eun tenn ne gollem : lapined, klujiri...
Ya ! ganeom ez eus bet tourni, distruj, c'hoari.
Eur wech all, êred¹⁸ ahanon, na ra ket da benn fall ;
Kemer da blijadur 'vel ma ra ar re all.

Azarias

Domaj eo, evid gwir ; ne vanke nemedoh,
M'hen asur... Mez, kredabl, c'hwi a wel uhelloh,...
Evel eur *filozof* e chomit dizeblant ;
Da veza eveldom n'hoh-eus avi na c'hoant :
Truez hoh-eus ouzim : ha ni a zo tud keiz !
Galoupad, ha terri or horv e-pad an deiz !
Treuzi koad ha menez, lagennou, parkeier,
Ha koll, alies, or poan hag on amzer.
E-leh chom trankilig, euz ar mintin da noz,
Evel eur bugel mad, e-kichenn ar paotr-koz,
Da zelaou penn-da-benn anezañ o kontañ
E boan hag e jagrin, ha da leñva gantañ.
Eur skwer gaer evidom ma n'eo ket deom eur vez !
Dalhmad redeg koajou, a-giz an dud gouez !
Hoh imor a blij din, kalz ho karan meurbed,
Setu anaoud an traou ! grit evel-se, bepred,
Mad ! mad !

Ar mab hena

M'ho kav ho-taou diboell ha digalon

Da zond d'am haketal, heb na kaoz na rezon ;
Braz-braz e kaozeit : me 'oa red din, moarvad,
Evid plijoud deoh-c'hwi abandoni va zad,
Hen lezel 'doug an deiz beuzet en e hlahar
Evid lond da redeg war-lerh gad ha klujar ?

Azarias

¹⁸ êred : ? Marteze "erered"

Mez mar klemm ar paotr-koz heb kaoz na gwir ebed,
Haq red eo deoh sevel a-du gantañ bepred ?

Ar mab hena

Gwir pe nann da-geñver ma'z on ken aflijet,
D'her zikour, me e vab, 'zo atao oblijet.
Doue d'ho tiwallo euz ar memez dravoud !
Ma ve... Petra ar zon m'on o paouez klevoud ?

Manasez

N'e' ket son glaz eo, sur, pe ne gomprenan tra :
Sell, sell, evid doare, du-ze 'zo bal brema'.
Hañ ! ya ! 'gre da baotr fur, bez atao kizidig
E-keñver eur paotr-koz a zo ken gwiridig.
Setu, euz e gostez, o weled out ken fur,
E kemer evidout bremañ e blijadur.

Ar mab hena

List ho kaketerez, c'hoaz deoh a lavaran,
N'ema ket ar mare da farsal, a gavan.
C'hoant em-eus, alato, d'anaoud ar mister-ze ;
Chomit da va gedal eun tachadig aze...
Mez setu eur pastor : gantañ 'vezo desket.

Trede diviz

Ar mab hena. Ar pastor. Manasez

Ar mab hena

Pastor, petra an traou em-eus, bremaig, klevet ?

Ar pastor

Petra ! n'ouzoh ket ?

Ar mab hena

Nann, mez c'hwi eur wech lavar ;
Muzikou meum klevet, kan moueziou, a zavar.

Ar pastor

Souezet on ganeoh-c'hwi ! goulenn petra 'zo ?
Penaoz !

Ar mab hena

Ha komz a ri ? lavar 'ta petra eo ?

Ar pastor

Eul levenez ar vrasa, e feiz !... oll dud an ti...

Ar mab hena

Mez perag ? petra 'zo ? ha lavared a ri ?
Va zad a zo er gêr ?

Ar pastor

O ! ya, na petra 'ta !
Ken laouen n'her gwelis morse, m'hen tou ama'.
Nann, biskoaz ken evruz n'em-eus gwelet ho tad,
Hag an oll, eveltañ, a zo en imor vad.

Manasez

Hañ ? ha fazia a reen ?

Ar mab hena

(d'ar pastor)

Lavar din 'ta, buan,
Petra ar mister-ze ne welan seurt ennañ ?

Ar pastor

Hag e rin.

Ar mab hena

Lavar 'ta, ha buan, e daou her.

Ar pastor

Edon er-mêz o kas va deñvedigou ker,

Pa glevis an trouz skiltr hoh-eus ivez klevet.
Dirag eur seurt burzud ha me chom sebezet.
Ha leskel va chatal, ha mond war-eeun d'ar gêr.
Ha qsetu e welan an oll oh oh ober cher.
Souezet muioh c'hoaz eged n'edon kent,
Ha me da gaoud Pharez a gavis war va hent.
Petra toud an dra-mañ ? – ha dre va dorn raktal,
O paka krog ennon, em harz e-barz ar zal.
Eno edo ho tad, gê, ha meurbed laouen ;
Hag o tostaad, neuze, 'welis en e gichenn
Eun den yaouank, edon, krak, o paouez gweled,
En andred-mañ, zoken, ha gantañ kaozet.
Dre gomzou brao ha flour, gand eun êr dous ha mad
En-doa greet kant goulenn diwarnoh hag ho tad.
Seblantoud a ree kared kement 'zo dre amañ,
Gwisket fall, a-hend-all, ma 'm-oa truez outañ.
Mez setu er gouel-mañ pep tra oll 'zo cheñchet,
Hag euz ar penn d'an treid her gwelan alaouret,
Ha koulskoude raktal hen anavezis mad,
Ha setu-me goulenn ano an divroad.
Ha Pharez neuze din a lavar eo ho preur,
E oa bet keid amañ klevet war e valeur.
Hag en-devoa ho tad greet en deiz-se, laza
Eul leue kaer ha lard, da reseo aneza'.

Ar mab hena

Ha kredi a hellan ar pezh a leverez ?

Ar pastor

Ya, laouen ! oh pep tra em-eus taolet evez :
Ho tad diwarnezañ ne denn ket eul lagad,
Ha dezañ her gweled, beb moment¹⁹, o pokad.
Ne vank hiviziken mui netra ken d'e joa,
Nemed ho kweled dond da hanteri ganta'.

Ar mab hena

Me ? o ! ne²⁰ ; kerz en-dro, d'am zad e liviri,
Goude eun taol ken pounner, ne din ket mui d'e di.

¹⁹ moment : galleg.

²⁰ ne : nann.

Pevare diviz

Ar mab hena. Manasez. Azarias

Ar mab hena

Penaoz, o va Doue ! ober din kemend-all ?

Azarias

Ar bouilloñs²¹, evid gwir, 'zo eun nebeudig sall ;
Ganeoh e seblanter kemer nebeud a neh,
Mez ba ! ar volodenn²² 'vo lonket brao ganeoh.

Ar mab hena

Me, gouzañv kement-se ?

Azarias

'Eneb eun tad ker mad,
Euz ho koler, 'michañs, e vo berr ar reuziad.

Ar mab hena

Drhel a rin dezi ? m'hen asur deoh ama'.

Manasez

Ba ! va faotr, na da ket da doui war netra.
Te, ober ar paotr rog ? te, facha ouz da dad ?
Te, rebech tra dezañ, dirag e zaoulagad ?
Evidon me 'bari mar krogfe er paotr-koz
C'hoant teuler ahanout er-mêz an ti, fenez,
E welfed ahanout raktal o tiskampi,
Ha marteze o tenna da dog d'her saludi.

Ar mab hena

Ne hedin ket beza lakaet er-mêz gantañ ;
Pqa deufe e-unan d'am hlask, zoken, amañ,
War va halon bleaset²³ netra ne hounezfe.

Manasez

Kleo, ma livirin dit va zoñj war gement-se :
Ar pezh a reer dit, evid gwir, 'zo kaled,
'Mez, goude toud, va faotr, e-peus her meritet.

Ar mab hena

Meritet, me ? penaoz ? dre betra, me ho ped
D'am deveriou a vab on bet fidel bepred,
Oh eun tad a garen wsentuz ha respetuz,
Morse n'on bet tehet diwar hent ar vertuz.

²¹ bouilloñs : galleg

²² ar volodenn : ar voleadenn.

²³ bleaset : va halon hloazet.

Manasez

Ha setu eno, krak, da faot ha da behed ;
A-forz da veza mad e vezer disprizet.
An oll respedou-ze, na oll deverigou
A rent atao, te 'wel, otusoh eun Aotrou.
Dond a reont da veza dirag e zaoulagad
Evel traou red a-grenn, dleet ha dleet mad.
Eun tad ho kwel atao, fur, jentil ha sentuz,
N'hoh espern mui, ha deoh ne de' mui damantuz.
O weled ho furnez n'en-deveus mui a neh,
Dond a ra ne gemer mui manegou ganeoh²⁴.
Gweled a rez petra eo koustet dit : furroh
Kant gwech e' bet da vreur... greet en-deus kalz gwelloh.
Eun devez e houlen e dra, e begement,
Ne ra forz euz dever, war varh, dao ! hag en hent,
Hag hep kemer tamm neh ganez na gand da dad,
En em daol da vragal ha da ober chervad.
Ha kement, ha ker mad, ma en-deus a-benn fin,
Lipet toud e strapenn, friket e *sanfruskin*.
Petra 'hoarvez ? 'dare, beh o chom en e za',
An naon deoh-c'hwi d'ar gêr a zegas aneza'.
Her gouzañv, goude her beza eun nebeud kastizet,
A vije euz ho perz eur hras en e andred.
Tra ! tra ! a-veh en-deus digoret e henou,
Lavaret, o klumuchad²⁵, eun nebeudig komzou,
'Vel eur zantimitouch²⁶ greet en-deus da leñva,
Mar deuer d'antoni²⁷ an *Te Deum* ganta'.
Ar paotr-koz, gand e joa, a zo eet evel foll,
Dour euz e zaoulagad a strink hag a ziroll ;
Pardoni a ra toud, pokad a ra deza',
Ha war boull e galon ne ehan ket d'her starda.
Ar mab 'zo gwisket kaer, eul leue lard 'zo lazet,
Hag en enor dezañ eur banket pourchaset,
Eur banket, ha da heul muizkou, sonerien,
Ha bremañ, kamarad, diganez m'her goulenn,
Ha biskoaz evidout kemend-all 'zo bet greet ?

Ar mab hena

A ! dre gement-se toud va halon 'zo mantret !

Manasez

Hag etretant da vreur, brao diouz taol azezet,
A lip e vuzellou, a zo laouen-meurbed.
Kontant ez eo, kredabl, anezañ e-unan :
Ouzit-te, 'vad, paour-kêz, truez a gemeran.
Karantez ar paotr-koz a zo oll evitañ,
Hag e vrasa soursi eo gounid anezañ.

²⁴ Dond a ra ne gemer mui manegou ganeoh : galleg.

²⁵ klumuchad : ?

²⁶ zantimitouch : ?

²⁷ d'antoni : galleg.

Ganez-te 'vad tamm neh, nann, foultr tamm-neh n'en-deus.
M'her hlev o lavared : ober kemend a freuz,
Ne gavan droug ebed, mez va gedal,avad,
Ne vije, a gredan, bet nemed deread...
Da hedal ? te 'zo sod, da gredi kemend-all ?
Daoust ha te 'gont bremañ ? marteze sur gwechall...
Hirio avad, te 'wel, n'eus nemed evita',
Zoken dezañ, moarvad, e vo red dit plega ;
Setu deut eur mestr all : petra 'dalv lavared :
Petra 'deuin da veza ? dit, mignon, eo gwelet ;
N'eo ket douar a vank er vro, gra da choaz.

Azarias

Evel m'en-deus friket e zanvez, seh ha glaz,
Bremañ 'vo red mad deoh ranna hoh hini ganta' :
Arabad sikanad war gwiriou na netra.
Diwallit na ve red lavared diou wech deh²⁸,
Pe, kredit ahanon, warnoh e kouezfe beh.
Er stad m'eo bet ho preur e veh lakaet d'ho tro ;
Eveltañ kollet toud, taolet war ar holo,
Euz an ti, kaer ho-pe, kaset kuit da viken,
E hellfeh eveltañ mond da foueta bouillenn.

Ar mab hena

O ! tad digoustiañs, setu, eta, ar pez
A resevan e priz euz va zentidigez !

²⁸ deh : deoh (evid ar rim).

Pemped diviz

Ar mab hena. Manasez. Azarias. Elias.

Elias

Ha n'ema ket amañ va mestr ha va Aotrou ?

Ar mab hena

Eo, setu-me amañ, deut eo din ar helou
Euz an oll ebatou a zo bremañ du-ze.
Mez kontit deom d'ho tro eun nebeud an dra-ze.
Mond a ra mad an traou ? an oll a zo seder ?
Hebdon, war a welan, brao-braz, e tremener.
Banket kaer, sonerien, netra da inoui ;
Mez n'eus ket greet din, nann, an enor d'am fed.
Na dalve ket ar boan soñjal en ennon-me !
Hag er gouel, 'm-eus douet²⁹, e vijen bet a re !

Elias

A ! kasit ar zoñj-ze, Aotrou, euz ho spered,
Ho tad en e gichenn en-deus mall d'ho kweled.
Euz e berz d'ho kerhad ez on deuet ama',
Rag hebdoh ne hell ket en em rei d'ar joa.
Ho preur en-deus ivez, bezit sur, mall eston
D'ho kweled, d'ho terhel stard war boull e galon.
O ! na zaleit ket, hag lakit en eur zond,
Ar barr d'al levez a zo bremañ du-hont.

Ar mab hena

Ya, evid an dra-ze oh degaset, eta,
Ha va breur euz e garr en-deus mall d'am staga ?
Eun dra bennag, moarvad, a vankfe d'an Aotrou,
Ha ne ven-me ket test euz e oll vombañsou ;
Mez kement-se 've re a lorh en eun devez,
Gand ar re all dezañ n'in ket d'ober al lez.

Elias

Ha posubl e hellfeh, o ! va mestr, Aotrou ker,
Disfizioud evel-se euz eun tad ken tener !
Euz ar pezh en-deus greet, perag e soñjit fall ,
Deut, gwelit hoh-unan hag eñ 'zo da damall.
Kredit mad ahanon, pa voh dirag ho preur,
An droug ho-peus outañ a gouezo war an eur.
Truez ho-poa outañ : n'eo mui ar pezh eo bet,
Deuit da veza test...

Ar mab hena

C'hoaz eur wech, ne din ket.

²⁹ douet : douetet.

Distroit pa gerot, me ho trugareka,
Mez ne fell ket din mond da droubli ar joa.

Elias

He zroubli a rafeh, ha krisoh, kredit mad,
Ma chomfeh aheurtet, hag heb mennoud tostaad.
Hag ar boan a rafe d'ho tad ar helou-ze !
Mez p'eo red : e-unan e teuio dizale.

C'hwehved diviz

Ar mab hena. Manasez. Azarias

Ar mab hena

Añfin,, gweled a rit n'on ket anakounac'haet,
Pedi 'reer ahanon ; mez mond ?... tra ! ne din ket.

Manasez

Brao, mad ! deut eo ganez, setu eur respont !

Azarias

Bezit sur, meur a wech o gwelot c'hoaz o tond,
Mez dalhit da respont atao ar memez tra,
Hag eur wech evid mad, deskit dezo beva.

Manasez

Nann, nemed re, siwaz ! n'e-peus-te gouzañvet ;
Euz da oll vadelez, pegen fall out paeet !
Petra ! da eur mab bet ken sentuz ha ken mad,
Hag evel-se 'tlee ober hirio eun tad ?
M'en-dije greet va zad din evel da hini,
Troad ebed da houde, ne lakjen en e di.

Seizved diviz

Pharez. Manasez. Azarias

Pharez,

Alo, mad ! Aotrounez, kouraj ! poagnit atao !
Heb mar, e rit aze ho-taou eur vicher vrao.
Pebez labour kempenn ! teuler, evel eun had,
Ar gasoni e kalon eur mab 'eneb e dad !

Manasez

Ha petra a gavit a fall en or homzou ?
Dalhit evid an tad, mar plij, ho rebechou ;
Ha penaoz her gweled oh ober kemend-all
Da eur mab, ha galloud mired da hen tamall ?

Azarias

Livirit en-deus gwir d'ober kement a ra,
Bdeteg an dro iñdign³⁰ greet da eur mab hena ;
Mez pa ne gavit mad e komzfem gand frankiz,
Ni a ya d'ho lezel gantañ en ho tiviz.
Lavarit dezañ sklêr penaoz ema ar stal,
Hag en-deus kemend-all pe gwasoh da hedall.

³⁰ iñdign : galleg.

Eizved diviz

Ar mab hena. Pharez

Pharez

Petra ! Tud ar seurt-se a zelaouit, Aotrou ?
E-leh trei kein dezo gand o gwall aliou,
O homzou brao ha flour o-deus ho touellet ;
Gouezit anaoud eta gwelloh ha mignoned.
Perag en ho kalon santimañchou ken fall
Evid eun tad karet kement ganeoh gwechall ?
Ha c'hoant ho-peus, eta, peurziskar anezañ,
C'hwi bet atao sentuz ha fur bete-vremañ ?
Deut, distroit d'ar gêr, deut d'en em unani...

Ar mab hena

E-unan em hontreg³¹ da vond kuit ezu e di.

Pharez

Eñ, ho kontregn ? ho tad ?

Ar mab hena

Eñ eo a zerr ouzin
E-unan dor e di : biken ne zistroin.

Pharez

Hag e kredit se, c'hwi, n'en-deus hebdoh ho tad
Kavet en e vuhez netra dous, netra mad ?

Ar mab hena

Va breur a zo distro, dezañ hiviziken
Eo red din ober plas³².

Pharez

Fazia 'rit a-grenn.
Perag tamall eun tad, ken mad ha ken tener,
Rag mar diskouez e joa d'eur mab distro d'ar gêr !

Ar mab hena

Pedra, evid gwir, da folla gand ar joa !

Pharez

Ha petra, ar joa-ze 'hell ho feuki, eta ?
Ne zoñjit ket, siwaz ! ez eo ho preur hennez.

Ar mab hena

Soñjal ? eo ! re, siwaz ! o ruzia gand ar vez.

³¹ hontregn : galleg.

³² ober plas : galleg.

Naved diviz

Ar mab hena. Pharez. Elias

Elias

Setu ho tad o tond, gand eun anken dispar.

Ar mab hena

M'ho lez...

Elias

Perag tehed euz eun tad hag ho kar ?

Ar mab hena

(o klask mond kuit)

Va list.

Elias

Mez, Aotrou....

Ar mab hena

Nann...

Elias

Sellit, ema aze.

Degved diviz

An tad. Ar mab hena

An tad

O ! va mab, diouzin e tehez evel-se ?
Ha n'ez out ken mab din ? ha n'ez on dit tad mui ?
Abaoe peur va zi ne deo ken da hini ?
Petra 'ra dit hirio klask anezañ tehed ?

Ar mab hena

En despet din, va zad, n'am hontregnit-hu ket !

An tad

Me, va mab ?

Ar mab hena

Deoh, goude ar pezh hoh-eus greet din,
Pa'z eo red, koulskoude, bremañ hen livirin :
Kmeent dever a hell eur mab renta d'e dad,
Em-eus, bepred, anezo en em akuitet mad ;
Mez ba ! kaer em-eus bet, se en despet da dout,
Gweled a ran, n'em-eus ket gallet doh plijoud.

An tad

Va mab, da oll aket, da deneredigez
'Zo skrivet em halon, n'o dizonñjin jamez.

Ar mab hena

Ha penaoz, o ! va zad, e hellfen heredi se ?
En em roet em-oa deoh oll korv hag ene ;
Aketuz, eveziant, pront da zenti dioustu,
Atao da blijoud deoh em-eus klasket an tu.
Nann, biskoaz, abaoe va bloaveziou kenta,
N'hoh-eus gallet rebech din an disterra tra.
Ped gwech, o tiarbenn, zoken, ho tezirou,
N'em-eus ket dilezet plijadur, c'hoariou ?
Ya, bezit test war ze, hag ober a hellfen
Mui eged n'em-eus greet 'vid eun tad a garen ?
Ha koulskoude, biskoaz, nann, n'hoh-eus din roet
Eur havrig da laza, 'vid reseo mignoned.
Medc a-veh eo deuet va breur fallaer d'ar gêr,
E-leh ober dezañ santoud pouez ho koler,
Ankounac'haet ganeoh e oll fallagriez,
E tiskouezit dezañ a bep seurt madelez.
Red eo ober gouel, a ray, dre eur banket,
D'an oll, evid arvest, or mez hag e dorfet.
Ha me, lach³³ ! a welo an oll oh va goapaad,

³³ lach : galleg.

Heb n'am-be leh da glemm, na gwir da hrozmolad ?

An tad

Penaoz, mab, va chatal ha ne deo ket da re ?
Kemer, laz anezo, gra a giri gante :
Ro pe gwerz, d'az tiviz, mestr ez out war bep tra,
Hag atao e vezi, pa hoantai beza ;
Kement a zo din-me, a zo dit-te ivez,
Ya, war bep tra, amañ, komandi a hellez,
Mez dirag eun darvoud ken dousa ha ken tener,
Evid kuzad va joa, penaoz en em gemer ?
Daz vreur a oa maro, hag eo resusiset.
Kollet edo, siwaz ! ha setu eñ kavet.
Mez setu eñ erru, o ! bez truez outañ !

Unnegved ha diweza diviz

An tad. Ar mab hena. Ar mab prodig. Pharez. Elias

Ar mab prodig

O tistrei d'ar gêr, seder her gwelan bremañ,
E lakan da zevel ha trouz ha kasoni.
Pegen kriz planedenn eo, eta, va hini ?
Va buhedz penn-da-benn a zougo he merkou ;
War an oll e seblant asxtenn va maleuriou,
Mez din-me eo plega d'ar blanedenn griz-se,
Me 'zo ar yaouanka, ha koupabl on ive',
O vond kuit e kasin pep trouz pell diouzoh ;
Bevit hiviziken evuruz hag e peoh.
Gwech, d'an dud reuzeudig, Doue 'ra trugarez,
Marteze oh va stad e kemero truez ;
Va divreh, da vihanna, am-bezo d'am zikour,
Va daouarn dre 'r vizer a zo greet d'al labour.
Pa añfin ar maro, doaniuz war va foaniou,
A lako gand va buhez fin d'am oll glahariou.

Ar mab hena

Nann, nann, va breur....

Ar mab prodig

Siwaz ! gwechall on bet
Ho preur : ne don ket mui, rag n'her meritan ket.
Ha kredi a rit-hu e hellfe va fehed
Morse mond euz va zoñj, na diwar va spered !
Mazb iñgra³⁴, breur fallaer, diouzoh o tehed,
Em-eus warnoh ho-taou an dizenor taolet ;
Kollet 'm-eus ar madou am-boa bet d'am lodenn,
Ha kollet em-bije kant gwech c'hoaz ohpenn ;
Euz a gement a chom ne houlennan netra,
Kmeent-se toud 'zo deoh, gwiriou ha peadra.
Nann, goude va zorfet, netar ne houlennan,
(Va zad, war gement-se, da dest a gemeran,
P'am laosk da rei dezañ c'hoaz an ano-ze).
Nde houlennan ken tra neemd deoh, ma plijfe,
Evid paea va faot ha va iñgrateri³⁵,
Va lezel da veza servijer en ho ti.
Evrus en em gavin da veza gouzañvet,
Hag ar renk kenta izella 'vo din re vad bepred.

Ar mab hena

A ! va breur, pardoni 'ran dit a galon vad !
Ya, va breur out atao, hag euz va daoulagad

³⁴ iñgra : galleg.

³⁵ iñgrateri : galleg.

An daelou o tiruill, a ra dit anaoud seder,
E vezi, war bep tra, ganen-me, daou-hanter.

Ar mab prodig

A ! kement-se 'zo re, d'ho taolin vqa lezit....

Ar mab hena

Nann, sao, sao, va breur ker, ha deus, ma pokin dit,
Ha ra vezim on-daou a galon, a spered,
Dre eur wir garantez da viken liammet !

An tad

Doue ! hag a hrasou em-eus deoh da renta !
Ha me 'helle gedal netra par d'an dra-ma' ?
Va daou vab rentet din ! pep tra troet da vad !
Anaoud a ran aze ho torn, Doue, on tad !
Ra vo da virviken meulet ho madelez ?
O ! Doue ! n'eus muzul ebed d'ho trugarez !
Grit ma'z aim, eun devez, d'ar Baradoz, ho ti,
D'hoh arvest da viken, d'ho kared, d'ho meuli !